

Asorez : bevañ e-kreiz ar mor

C'hoant ho peus da vont da veajiñ ? Emichañs n'ho peus ket c'hoant da vezañ beuzet en ur mor a douristed avat... 'Barzh ar meurvor ne lâran ket ! Re yen eo amañ ? N'ho peus ken nemet mont da Inizi Asorez : brav-eston, ha n'int ket darempredet kement-se daoust d'an aer domm a gasont deomp e-pad an hañv...

Kaoter ar Seizh Keoded (Caldeira Sete Cidades) war São Miguel. Holl ar skeudennou © Yann-Loeiz Kabell

e-kreiz ar Meurvor Atlantel emañ Inizi Asorez, d'ur 1500 km bennak eus Portugal ha div wech pelloc'h eus Amerika an Hanternoz. Un enezeg nav enezenn enni eo an Asorez, 2 335 km² enne (Breizh zo 34 000 km²). Dispartiet int e tri rumm : strollad ar reter (Santa Maria ha São Miguel), strollad kreiz (Terceira, Pico, Faial, São Jorge ha Graciosa) ha strollad ar c'hornôg (Flores ha Corvo). Dous-tre eo an amzer : ur c'heitaad a 15° a vez e-pad ar goañv hag a 23° e-pad an hañv. Klouar e vez ar mor ivez a-drugarez d'ar *Gulf Stream* : 17° e-pad ar goañv ha 25° e-pad an hañv. Ha gouët a rit eo o anv ur fazi ? N'eo ket *açores* (gwazfalc'huned) met *milagres* (skouled) a vez gwelet o nijal hag o neizhañ eno. Ergerzhet e oa bet an inizi-se evit ar wech kentañ e-kerzh ar 14^{vet} kantved (etre 1317 ha 1339 a-hervez) gant moraerien eus Portugal, Breizh pe Flandrez. Diego Silves zo bet meneget gant an istorour Damiao Peres evel ergerzher kentañ an inizi avat, e 1427. Trevadennet int bet adalek 1439.

INIZI TAN DEZHE

Hervez lod e oa an Asorez Enez an Atlantedid gwechall gozh. Piv 'oar ? Moarvat ho peus lennet *Voyage au centre de la Terre*

(Beaj e-kreiz an Douar) gant Jules Verne pe levr bannoù-treset Blake ha Mortimer, gant Edgard P. Jacobs, anvet *L'énigme de l'Atlantide* just a-walc'h, e-lec'h ma vez gwelet splann kaoter ar Seizh Keoded (Caldeira Sete Cidades) war enez São Miguel. Koulskoude n'eo ket an inizi ken kozh-se e-keñver lec'hioù all. Kenderc'hel a reont da greskiñ c'hoazh : ur menez-tan nevez, Capelinhos, hag a zo difluket eus ar mor e 1957, zo oc'h ober un astenn e kornôg enezenn Faial. Evel-just, emaint war ar geinenn veurvorel evel Island... e-lec'h ma c'hoarvez kement all ! Anat deoc'h e c'hall an douar krenañ ivez gwech an amzer. An nav enezenn zo bet ganet neuze a-drugarez d'ur menez-tan. Ar pezh a laka Ponta do Pico da vezañ lec'h uhelañ Stad Portugal : 2 351 metrad a-us d'ar mor. Ur blijus a grapadenn gaer !

HAG AR BOBLAÑS, TUDOÙ

E-tro 250 000 a dud zo o vevañ en Asorez (104 dre km²) hiziv an deiz. Menajerien, pesketaerien al lod brasañ anezhe. Pe an daou war ar memes tro zoken ! Kompren a rit neuze e vefe aet kuit un toullad mat a dud eus an Asorez evit klask un tamm friko. En holl e vefe ur milion a dud asorat a orin strewet etre Portugal, Kanada, ar

Stadoù-Unanet, Europa ha Brazil. Plijout a ra dezhe distreiñ d'o bro da vakañsiñ pa c'hallont. Ne dalvez ket ar boan neuze degemer karradoù-nij a douristed ouzhpenn... Moraerien pe pirc'hirined ne lâran ket ! Glan ha brav-eston e chom ar vro evel-se. Dre vras eo deuet ar boblañs eus Portugal met lod zo deuet ivez eus Breizh pe Flandrez... ha dalc'h het an eñvor eus se en anvioù-lec'h zo : Bretanha war São Miguel, Flamingos war Faial...

HAG AN NATUR, PICHONED

Estreget skouled ha skraved a vez gwelet ha klevet. Kalz evned, pichoned, ya, hag evned-mor en o zouez evel-just, evel an torted du hag an torted bras. A bep seurt bronneged zo, doñv pe ouez. Saout evit al laezh hag ar formaj da skouer, ha lapined e pep lec'h. Kalz a besked (nebeutoc'h-nebeutañ bremañ) a vez kavet er mor tro-dro, darempredet ivez gant balumed ha begoù-hir. Liesseurt eo ar plant ha lod anezhe eus ar broioù-tomm da vat : azale, hortañsia (pe kaouled), gwezeraden. Bezañ zo gwez heñvel ouzh re Europa ha re all evel re an trovanooù : palmez, akajou, sedrez. Plantet e vez avalened-ananas, te, butun ha... gwiniegi. Ar vinho do Pico zo brudet en inizi !



Ponta dos Capelinhos, ar menez-tan nevez a-bell.



Kuzh-heol war Pico.



Ul lamm-dour war Flores, an enezenn anvet mat !

An nav enezenn

Santa Maria

97 km². E-tro 6000 annezad. Enez kentañ bet ergerzhet hag an hini tostañ eus ar c'hevandir. Vila do Porto eo ar gêr vrasañ. Parkeier e-leizh a-istribilh ouzh roz ar menez. Ur greizenn hentañ ar c'hirri-nij zo warni. Eus Santa Maria n'hall ket bezañ spurmantet an inizi all avat.



Banniel Asorez.

São Miguel

747 km². E-tro 135 000 annezad. An eil enez bet ergerzhet hag an hini vrasañ. Kêr-benn an enezeg, Ponta Delgada (30 000 den) zo ur porzh kenwerzh ivez. Glas-tre eo Saõ Miguel. Diabarzh an enezenn zo chomet glan ha gouez a-walc'h. Stummet e oa bet gant un aridennad menezioù-tan, teir c'haoter vras en o zouez (lenn Sete Cidades, lenn an Tan ha lenn Furnas). Eus São Miguel n'hall ket bezañ damwelet douar all ebet kennebeut !

Terceira

400 km². E-tro 57 000 annezad. An trede diskoachet neuze ! Ar pep bravañ war an enezenn-se zo an div gêr vrasañ : Angra do Heroismo ha Praia da Vitoria. Sec'hoc'h ha plaenoc'h eo evit São Miguel. Parkeier zo a-vil-vern koulskoude. War-zu ar c'hornôg e vez gwelet inizi all.

Pico

433 km². E-tro 15 000 annezad. An hini uhelañ eo gant he menez-tan. Arabat ankouaat pignat warnañ ! Madalena eo ar gêr vrasañ. Gwin gwenn Pico zo brudet. Balumetaet e veze gwech all. Peskataet e vez bepred.

Faial

172 km². E-tro 16 000 annezad. N'emañ ket pell eus Pico. Horta, kêr an enezenn, zo brudet ar porzh anezhi gant ar voraerien evel un ehan war hent an Antilhez. Gant pep bagad pe dost e vez laosket e roud e stumm ul livadenn vrav a-hed ar c'hae... Kreskiñ a ra an enezenn-se c'hoazh a-drugarez d' he menez-tan nevez.

São Jorge

246 km². E-tro 11 000 annezad. Un hir a enezenn e-kreiz ar strollad kreiz, kenstur gant Pico. Velas eo ar gêr vrasañ. Tevennoù uhel ha serzh zo anezhi war bouez ar fajas, douaroù izel a-rez ar mor, aloubet gant ar besketaerien evel-just. Formaj saout São Jorge zo ul lip-e-bav !

Graciosa

62 km². E-tro 5 000 annezad. Ur gaer a enezenn en hanternoz São Jorge. Santa Cruz da Graciosa eo ar gêr vrasañ. Gwin, maiz ha gwinizh a vez gounezet. Milinoù brav zo ivez.

Flores

143 km². E-tro 4 500 annezad. Enezenn ar bleunioù eta ! Santa Cruz das Flores eo ar gêr vrasañ. Penn kornôg Europa da vat.

Corvo

17,45 km². E-tro 500 annezad. Ur gêriadenn : Vila Nova do Corvo. E-barzh lenn ar menez-tan e vez gwelet nav enezenn ! Pa oa bet ergerzhet e oa bet kavet un delwennig, a-hervez, kizellet gant ur peñsead moarvat.

enezeg (b.) : *archipel*
gwazfalc'hun : *autour*
skoul : *milan*
Keinenn greiz : *arête centrale*
tort du, daden du : *puffin fuligineux*
tort bras (gingo en Enez-Sun) : *puffin majeur*
bronneg : *mammifère*

Yann-Loeiz Kabell